

Galv mesaer menez Are

D'am nizez vihan, Jann Grall.

An ton-man a zo bet dastumet e Kerne-Uhel. Diès e vije kavout bravoc'h egetan ! Savet eo war eur skeul-gan (« gamme » e galleg) koz, a veze graet anezi « skeul-gan Lokrian » gant ar C'hresianed. Ar re-man, en o skridou brudet, o deus lezet ganimp disklériadur diwar-benn ar « skeul Lokrian », nemet skouer ebet anezi ne anavezet betek-hen. Eun enor eo eyit hon Breiz-Izel, a zo bet miret ganti en he yez keltiek hag en he zoniou dispar kaera herez an amzer-goz, kaout e-kreiz he zensor ar berlezen-man. Ar c'homzou a zo war an ton a zo bet savet gant hon mignon Ivonig Picard. Trugarez d'ezan !

M $\text{♩} = 72$

O lo le, O lo le, o lo le, o lo le,
 le O lo breudeur, deut d'am c'hichen
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 le Se-laouit va chanaouen O lo lo
 O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le (1),
 O lo, breudeur, deut d'am c'hichen ;
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 Selaouit va c'hanaouen.
 O lo lo. O !

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 Va-unan el lann divuzul,
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 'Renkan chom pemde ha sul.
 O lo lo. O !

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 En eur welet 'c'h en em astenn,
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 Askel ar skoul 'us d'am fenn.
 O lo lo. O !

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 Ha klujet ar vran velkonius,
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 D'am c'halon gwall-ankenius.
 O lo lo. O !

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 Er pellder mouez ar gornigel,
 O lo le, o lo le o lo le, o lo le,
 A c'hournij 'barz an avel.
 O lo lo. O !

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 E-pad ma seblant va ene
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 'N em leda war ar mene.
 O lo lo. O !

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 Va-unan el lann divuzul,
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 'Renkan chom pemde ha sul.
 O lo lo. O !

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 O lo, breudeur, deut d'am c'hichen.
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
 Selaouit va c'hanaouen.
 O lo lo. O !

Ivonig PICARD.

Notennet eo an ton eun tammig izel. Ar re a vez ganto moueziou skleltr a hello e uhelaat, dre chenj an noten « re » en noten « la ».

(1) Distagit evel pa ve skrivet e galleg « lè ».